


VIII.

Var mor ar bed kounnaret,
 Patronez dous ha mad,
 Holl ni rouïenvo bepret
 Dindan ho taoulagad,
 Betek ma c'hellimp eüruz,
 E peoc'h, gant ho pennoz,
 Douñara tost da Jezuz
 E porz ar Baradoz !



Permis d'imprimer :

Quimper, le 29 Juillet 1889.

A. SERRE,

Vicaire général.

Kemper, Moullerez ru an Dudchentil.

KANTIK

ITRON-VARIA 'R MOR


TON : *Breurie ar Feiz.*

I.

O pa red skanv ha lijer
 Hor bag var ar mor glaz ;
 Pa vez dinerz ha dister
 E kreiz an tarziou braz,
 Ho sklerijen a glaskomp,
 Stereden dudiuz,
 Lezit da guêza varnomp
 Eur zell karantezuz !

DISKAN

Kerz eta, bagik vihan,
 Dindan douñn ar Verc'hez,
 Kerz eta, mez kerz buhan
 Hep aoun hag hep enkreiz,
 Rag hor Mamm holl c'halloudek,
 Itron-Varia 'r Mor,
 A ziualllo kalounek
 Martolod an Arvor !



II.

Eïenen hon esperans,
 Patronez hon aochou,
 Dirazoc'h gant kalz fizians
 Daoulinet hon tadou,
 Ped guech n'int ket bet guelet
 O pedi, o c'houlén
 Pellât an avel follet
 Diouz ho bag dizouten.

III.

A dreuz kerrek ha reier
 Ker stank var aod hor bro,
 Bezit, o c'hui, Mamm dener,
 Ouz hon digass atô ;
 Rag ar mor-ze 'zo spountuz
 Hag eo bresk hor bagik ;
 Pa z'eo 'ta ken danjeruz,
 Ouzomp grit eur zellik.

IV.

Guec'hall sant Yann ha sant Per,
 P'edo gantho Jezuz,
 A lavare d'hor Zalver
 Rei peskerez founnuz :
 D'ho trô renit ar pesket,
 En deiz koulz hag en noz,
 Var hor rouejou steignet
 Gant poan 'vit ho gortoz.

V.

Torrit an avel diroll,
 Grit ar mor dirouven,
 Hag ar vag, d'ar C'huz-Heol,
 A zistroïo laouen :
 Dindan ar beac'h daou-bleget,
 Ma vez mad an dervez,
 Ar vamm, ar mab, ar pried,
 Ho pennigo bemdez.

VI.

Ha ma chomm pell hon distro,
 Ma vezomp dianket,
 O tiredet c'hui velo
 Hor mamm, hor c'hoarezed,
 Da grial, en eur voëla :
 O mor, mor didruez,
 Arabat did sebelya
 Bag ar peskêtour kœz !

VII.

Diouallet en danjerou,
 Ni, Guerc'hez benniget,
 'Vit seveni d'hor goëstlou,
 En dourn hor chapeled,
 Ama ni 'voëzo kinnik
 Eur piled braz ha kaër,
 Evel ma ree birvidik
 Guechall pep pesketaër.